

45

Goude bennos ar Verc'hez, aroc mont eus an ty,
 E c'houlen a vouir galon diganêc'h hoc'h hini :
 Or ta deut eta a vouir galon
 Da réy gant ho puguel ho penediction. .

Evit ar Vam.

Ha c'houi, mam garantezus, pini deus he maguet,
 Eur mennat a c'houlennàn, ha n'am refusot qet :
 Ho pennos a c'houlennàn ganêc'h evit ho puguel,
 Evel a eure güeachal ar Patriarch santel.
 Bennos brendeür ha c'hoarezet ive pareillament,
 Hini paeron, maeronez, mar maint amàn presant,
 Hini ar Zent, an Æles, hac hini ar gompagnunez
 O deus grêt dî en or d'e asista en e devez.
 Ha brêmàn Demp, en hano santel a Zoue;
 Goude renta hon hommach, oblijet omp da ze.

*Brêmàn e ve lavaret eur Bater, eun Ave hac eun
 De Profundis, hac e saver er za.*

Savit ta, Merc'h Yaouanq, da zont da dy Doue,
 Evit effectui en antier ho promesse,
 Da virat fidelite bete fin ho pue,
 Ha goude d'en em velet en barados Doue.

DISCOURS

Pa roer eur Plac'h, hac evit échui tout.

Qemerit, va mignon, eun nebeudic courach,
 Rac êru oc'h souden er fin eus ho peach ;
 Ha ne c'houlennàn qet mui nemeur a dermen ,
 Rac me vel eo échu brêmàn va zrajedien.
 Me a garfe certen demeus a greiz va c'halon
 Caout assur eun nebuet a gonsolation.
 Didostait amàn en qichen d'an treujou ,
 Ha me a royo déch gant joa vras eur c'hélou

46

Pehini a ellàñ credi certenamant
 A rejoüisso meurbet ho santimant ;
 N'en dêo qet eur c'hêlou hep netra qen,
 Rac cetu amàn dirazoc'h suramant eur femelen
 Pini a lavarac'h, va mignon,
 A blije meurbet bras d'ho calon.
 Cetu amàn, me grêd, eur femelen
 A zo caeroc'h eguet eur chinofen,
 Roz, na fourdilis, na levant :
 Speret an oll a rent contant.
 El lec'h ma ve tevalijen e laqa pep seurt sclêrijen :
 Caer eo evel eur stereden, quer caer hac ar verelaouen.
 Roit an dorn deo dezi brêmàn,
 D'e c'hass ganêc'h demeus an ty-màn :
 Ha mar er grit, clêvit eur guer :
 Dioüallit eus ar goalinier
 Eus a zorn Doue oll-buissant,
 Da bunissa an dud mechant.
 Me a lavar ar goalinier
 Eus e furor hac e goler,
 Da lavaret eo, ar c'hollou,
 Ha calz demeus a valeuriou
 Pere a eller da evita
 O veva gant grac Doue er bed-mâ.
 Bevit bepret ho taou en doujanç Doue,
 Hac ho pezo certen peb seurt prosperite.
 Peguement benac hep nep douetanç,
 Ec'h ouzoc'h mad qement-se en avanç.
 Gant ho permission e lavarin brêmàn
 Ebars eur guer pe zaou, va zelaouit amàn :
 Qemesqet eo, allas ! atao buez an den,
 Bepret demeus a joa hac a anqen ;
 An tieguez zo eul lest,
 Exposet da veur a dempest :
 Ret eo déc'h beva en güir union,
 Ha Doue a roy déc'h e venediction.

47

Peb den zo gant Doue choazet
 Evit beza eürus ha salvet.
 Hoguen ret eo goude goulén
 Beva just en güir Gristenien.
 Contemplit ar societe
 A zo entre an douar hac en êe ;
 Goulennit bepret digant Doue
 Courach ha nerz d'ho liberte
 Evit ober peb tra parfet ,
 Evit se e zoc'h digasset.
 Retorn a ranqit adare
 Da renta cont da eun Doue.
 Gout a rit , ne zouetâñ qet
 N'oc'h eus eun adversour er bed.
 An adversour-ze eo Satan ,
 Siouas deomp oll guittibunan !
 Pa falvezo d'an drouc-speret
 Dont da debuchi ho speret ,
 Respondit : *Abrenuntio* ,
 Ha lavarit : sinet eo.
 An Autrou-Dœue eo ar brassa ;
 Enor ha gloar rentomp dezâ ,
 Evit goude beza labouret ,
 Hervez hon nerz hac hor yec'het ,
 Pa c'hefet divar an douar ,
 E recevet eur gurunen er Gloar.
 Ouspen , er goalen a eured
 E zeo ar garante comprenet ;
 Dre ma zêo rond ar voalen ,
 Ne all finissa birviqen.
 Ne zeus fors absolumant :
 Ret mad eo da eun den parlant ;
 Ma ne respontomp qet an dud ,
 E teufent da lavarat e zomp mud.
 Sònjet hon eus da ober voell ,
 Sèvel amàn eur zantinel ,

48

Hac a vo grêt en form eun ty,
 Evit respont d'an dremenedi.
 Ha c'houi ive, va mignon qèz ,
 Mar oc'h eus marc'hadourez
 Pe da brena , pe da voerza ,
 Partiit buan gante da guenta ,
 Evit Montroulez pe Gastel ,
 Hac e profitot ne vo qet pell ;
 Eno e cafot honestamant
 Peadra evit hoc'h arc'hant.
 Eur garante evel honnes
 Ne all qet finissa james.
 Credi a ràn hoc'h eus pedat
 Jesus hac e Vam beniguet
 Da asista en hoc'h eured.
 Demip-ni bremàn , compagninez ,
 Da offr hor peden assambles
 Er sacrific an oferen ,
 Da c'houlen graçou souveren ;
 Hac evidomp hac evite ,
 Gouleñnomp graçou ouz Doue .
 Er fin , o tont da finissa :
 Dalit he dorn , croquit ennâ ;
 Promettit dezi fidelite ,
 Hac hi a brometto déc'h ive .
 Cetu aze he dorn deo
 Doue dre e c'hraç d'ho cunduo .

FIN.

Propriété.